




MIRDI BREIZHEK AN DEPARTAMANT TRES LEC'HIAÑ


Rez-an-douar (RC)

STRAED AR ROUE GRALLON




- ① ② Oadvezh ar metaloù ha Henamzer
- ③ ④ Krennamzer ha marevezh modern
- AT Diskouezadeg verrbad
- ED Lec'h diskuizhañ

Estaj 1^{añ} (1)



- ⑤ ⑥ ⑦ Gizioù ha klichedoù : Gwiskamantoù hengounel
- ⑧ ⑨ Arrebeuri breizhek

2^l estaj (2)



- ⑩ Prierezh rannvroel
- ET Diskouezadeg verrbad



DEGEMER MAT E MIRD BREIZHEK AN DEPARTAMANT

Mirdi breizhek an departamant, krouet e 1846, zo staliet e Palez kozh eskibien Kerne, lec'h annez an eskibien. Ar savadur a c'hoarvez eus div gazel a bep tu d'un tour-skalieroù kinklet e giz an Azginivelezh. Savet e voe gant an eskob Klaoda Roc'han e 1507. Bez' eo al lodenn goshañ eus ar savadur. Sebezet e vezer gant an tour serzh ha mistr-se ha gant kinkladur flammek e brenestroù. Ar gazel e straed ar roue Grallon zo eus ar XVII^{vet} kantved, gant ur c'hinkladur klasel-kenañ, evel ma oa ar c'hiz er mare-se. An eil kazel, a-hed an Oded, a oa bet savet e 1776 hag adaozet en XIX^{vet} kantved evit degemer rannioù an eskob enni. Er memes mare, evit klozañ ar porzh, e voe savet ur c'hloastr ma c'halle an eskob mont war-eeun d'an iliz-veur drezañ eus e balez. Krouet e oa bet gant ar savour Joseph Bigot, en doa savet korzennoù iliz-veur Sant-Kaourantin ivez.

1 straed ar Roue Grallon – 29000 Kemper

☎ 02 98 95 21 60

→ <https://musee-breton.finistere.fr>

✉ musee.breton@finistere.fr

📘 [musee.departemental.breton](https://www.facebook.com/musee.departemental.breton)

📷 [musee.breton](https://www.instagram.com/musee.breton)

Rez-an-douar

①② Oadvezh ar metaloù ha Henamzer

(- 600 000 vloaz → V^{vet} kantved goude Jezuz-Krist)

Tud a voe e Penn-ar-Bed adalek henoadvezh ar maen (paleolitik), 600 000 bloaz zo. Adalek 2200 vloaz a-raok hon oadvezh, e-pad Oadvezh ar metaloù, e oa deuet war-wel labour ar metal. Gant arem, houarn hag aour e veze oberiet kalz a draezennoù, binvioù, armoù pe bravigoù gant ar Vretoned. Eskemmoù a voe gant rannvroioù ha broioù all, ar pezh a zegasas ur binvidigezh vras.

E-pad an Henamzer, war-dro 52 a-raok hon oadvezh, e voe aloubet Arvorig gant ar Romaned. Ar Romaned hag ar C'halianed a vevas enni kichen-ha-kichen. Diazezañ a rejont keodedoù, sevel a rejont ur rouedad hentoù, ha sevel a rejont kalz monumantoù evel kenkizoù ha kibellidioù. Produet e voe muioc'h-mui a listri hag ivez traozoù emwalc'hiñ ha prederiañ ar c'horf. Ur plas a bouez a oa gant ar relijion, evel m'en diskouez kalz a zelwenoùigoù gwenn (Gwener, doueez-vamm).

③④ Krennamzer ha marevezh modern

(V^{vet} kantved goude J.-K. → XVII^{vet} kantved)

Arzoù Breizh da vare ar Grennamzer zo kinniget gant togennoù roman saveteet pa oa bet distrujet savadurioù. E dibenn ar Grennamzer e voe produet kalz bezioù delwenoù kizellet en o gourvez warno ha gwerenoù-livet levezonet gant ar gizioù italian ha flamank. Diskouez a ra an delwenoù relijiel pegen bras eo an niver a sent e Breizh.

Estaj 1^{añ}

⑤⑥⑦ Gizioù ha klichedoù : Gwiskamantoù hengounel

(XIX^{vet} kantved betek an deiz a hiziv)

Gwiskamantoù Breizh a veze gwisket d'ar pemdez evel d'an deizioù-gouel. Gwir deulioù identelezh o ferc'henned int. Diskouez a reont int gwriziennet en ur vro, un oad eus ar vuhez, diskouez a reont o renk er gevredigezh hag o saviad familh...

Luc'hskeudennoù eus ar mareoù-se, tapet war an tomm, liammet ouzh ar gwiskamantoù, a ziskouez penaos e oa buhez pemdez tud Penn-ar-Bed.

⑧⑨ Arrebeuri breizhek

(XVIII^{vet} kantved → XX^{vet} kantved)

Aroueziet eo arrebeuri Penn-ar-Bed gant un emdroadur eus ar gizioù : hengoun, rannvroelouriezh, arz nevez, modernelezh. Kinnig a reer ar re-se en ur adsevel pezhioù eus an ti. Livadurioù ha traozoù ar pemdez a laka doare bevañ ar bobl e Penn-ar-Bed war-wel.

2^l estaj

⑩ Prierezh rannvroel

(XVIII^{vet} kantved → XX^{vet} kantved)

Gant an dastumad feilhañsoù bodet er sal-mañ e c'haller taolenniñ emdroadur ar produerezh e Kemper abaoe an XVIII^{vet} kantved : kinkladurioù gant plant, delwenoùigoù relijiel, arvestoù giz Breizh, priaжоù talvoudek, feilhañs poblek, darvoudoù brezel.

ET Diskouezadeg verrbad

An diskouezadegoù berrbad, hervez ar programm, a lakaer ganto puilhded hag istor Penn-ar-Bed war-wel.



Finistère
Penn-ar-Bed